

# IMBOURC'H

29 C'hwevrer 1972

Niverenn 26

IMBOURC'H,            K E L A O U E N N   B O L I T I K E L

Trede bloavezh

Niverenn 26

29 C'hwevrer 1972

T A O L E N N

Stourm sevenadurel ha stourm politikel.....	p.35
Renta-kont Dael gentañ SKOL AN EMSAV, Gwengamp 11 a viz Du 1971.....	p.41
Danevelloù obererezh kreizennoù SKOL AN EMSAV. Danevell obererezh Kreizenn SKOL AN EMSAV, Roazhon.....	p.46
Kreizenn Wengamp.....	p.50
Danevell diwar-benn obererezh Kreizenn nevez SAE e Brest..	p.51
Danevell a Vro-Bagan.....	p.53
Devezhioù-studi : rentañ-kont ar gendael a-zivout an Devezhioù-studi e Plistin.....	p.55
Skol An Emsav eil derez : danevellskrid kendael Devezhioù-studi Plistin gant I.G. ....	p.56
Skol An Emsav : Kevrenn an Eil derez gant Tangi Louarn....	p.59
Skol An Emsav hag E.B.V. ....	p.61
Beignon.....	p.62

An niverenn-mañ eus IMBOURC'H a zo gouestlet da gudennoù SKOL AN  
EMSAV. An embanner anezhi, karget pergen da zastum ar pennadoù,  
a zo bet Ivon Gag, eus Kreizenn Roazhon-Kêrgaer.

---

Koumanant-bloaz : ugent lur (20 lur). K.R.P. Y. Ollivier,  
1534 25 Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz  
Genver. Priz an niverenn : 2,00 lur. Ar pennadoù hag ar  
pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier, 7 bd. A.-Burloud,  
35 - Roazhon.

CPPP 50 015

---

TABLEAU

TABLEAU

KASIT HO KOUMANANT

KLASKIT KOUMANANTERION NEVEZ

DA IMBOURCH'

-----

Faint, illegible text, possibly bleed-through from the reverse side of the page.

Faint, illegible text, possibly bleed-through from the reverse side of the page.

S T O U R M   S E V E N A D U R E L

H A   S T O U R M   P O L I T I K E L

Warlene e oa bet embannet endev un niverenn eus IMBOURC'H gouestlet da gudennoù SKOL AN EMSAV. Setu adarre eta un niverenn nevez eus ar gelaouenn-mañ gouestlet d'an hevelep kudennoù nemet aozet en dro-mañ gant un niver a izili eus an aozadur e unan. E ser se e fell din lavarout pegen plijet on oc'h embann skridoù savet gant stourmerion yaouank o deus desket ar yezh e-kerzh ar bloavezhioù tremenet, a-wechoù e SKOL AN EMSAV hec'h unan, hag a zo gouest hiziv da skrivañ enni pennadoù a seurt gant ar re a vo kavet en niverenn-mañ eus IMBOURC'H.

Peogwir emañ ganti e lavarinn - pezh a oar an holl - n'eo ket IMBOURC'H, eveljust, kelaouenn gefridiel S.A.E. nag aozadur all ebet, E.B.V., pergen. Ur gelaouenn dieub ez eo. O c'hortoz ma vo savet ur gelaouenn evit ezhommoù S.A.E. - labourioù a bep seurt, kemennadurezhioù h.a. - , pezh na zaleo ket re, spi am eus, e vezin laouen bepred o reiñ bod da c'hortoz da stourmerion hon aozadur kelenn broadel.

-----  
Ober a ran va mad eus an dro-mañ ivez evit displegañ va memnoz diwar-benn S.A.E., evel ezel eus an aozadur-mañ end-eeun.

Kavout a ra din eta ez eo S.A.E. unan eus an aozadurioù ar muiañ goanagus e Breizh hogen e chom ivez war un dro bresk meurbet evit ar poent.

Lavaromp avat, da gentañ, perak ez eo goanagus S.A.E. En ur ober daou vloaz hanter ez eo ledet an aozadur-mañ e meur a gêr en hanternoz Breizh ; devezhioù-studi e-leizh a zo bet dalc'het ; un niver bras a-walc'h a skolidi o deus desket ar yezh ervat, a zo gouest a-benn bremañ da gomz ha da skrivañ anezhi. Labourioù zo a zo bet kaset da benn, dreist-holl e par an eil derez ; embannet ez eus bet zoken. un dornlevr brezhoneg evit an eil derez ; hep dale - evit se e vo mat marteze krouiñ ur gelaouenn evit izili S.A.E. a garfe moulañ o labourioù en ur gelaouenn gefridiel eus an aozadur - e teuy er-maez labourioù all gant izili eus S.A.E. pe hiniennoù oc'h harpañ anezhi dre hanterouriezh IMBOURC'H betek henn. Kement-se holl a zo goanagus d'hor soñj.

Hogen ret eo ivez diskouez mankoù ha sioù an aozadur evit gellout gwellaat dezho ha tec'hout diouzh an tonkadur en deus sammet nouspet aozadur all a seurt gantañ Breizh a zo dizeriet pe a zo chomet da grakvevañ hep gellout ober berzh da vat, ma fell deomp er c'hontrol e kendalc'hfe da greskiñ ha d'en em ledañ dre Vreizh a-bezh. Unan eus ar sioù-se a zo, da gentañ, an diouer a frammadur start. Maz eo mat a-walc'h ar genurzh en ur greizenn evel hini Roazhon ez eo ret lavarout koulskoude e chom re deuc'h an darempredoù a rannbarzh da rannbarzh pe a gêr da gêr. Ha kement-se moarvat a vir ouzh un emskiantekadur start a ziwanañ e diabarzh an aozadur penn-da-benn. Ret e vo eta kenurzhiañ startoc'h an darempredoù etre rannbarzhioù en amzer-da-zont. Moarvat eo bet digollet an diouer a zarempredoù gant emgavadegoù evel an Devezhioù-studi broadel pe an Dael e miz Du diwezhañ hogen o vezañ m'eo bet divizet diwar vremañ liesaat an devezhioù-studi e par ar rannbarzhioù o unan e vo dav moarvat diorren kejadegoù hag emvodoù kefridiel egiz re an Dael pe lakaat en e blomm ur staeliadur-gweladenniñ a-benn reiñ da S.A.E. ar spered kengorf he deus ezhomm anezhañ evit kenderc'hel da greskiñ.

Un diouer a zarempredoù a zo da gentañ un diouer a frammadur ha drastus eo an diouer-se e kevrennoù zo evel an eil derez. Warlene en em vode bep sizhun izili eus an eil derez evit kas war-raok o labourioù. Er bloaz-mañ avat, dre m'o deus izili zo eus an eil derez kuitaet Roazhon ez eo paouezet an emvodoù-se ha ne gav ket deomp ez int bet kendalc'het en ur stumm bennak, dre lizher, da skouer. Petra a zo kiriek d'an dizeriadur-mañ ? Meur a abeg a zo da gement-se e gwirionez. Unan eus ar re-mañ a oa dres an diouer a frammadur : ar re en em gave en eil derez a oa holl a youl vat, da lavarout eo, n'o doa gouestlet netra ha dre se n'en em santent ket ereet da vat ouzh ur reoliadur pe un deiziatadur resis evit pourchas o labourioù. Ma ne reer ket emvodoù reoliek evit labourat avat, pe ma chomer hep dont war zigarez pe zigarez, anat eo ne c'hell biken labour sirius ebet bezañ kaset da benn. Den n'eo rediet eveljust da gemer perzh en obererezh S.A.E. Hogen d'an hini a venno emezelañ eo prederiañ abarzh reiñ e anv evit gouzout ha gouest e vo da seveniñ e labour en un doare reoliek e-kerzh ur bloavezh bennak. Ma soñj dezhañ ne c'hell ket arabat eo dezhañ prometiñ netra rak o chom hep ober al labour a zo dleet e skoilho strivoù ar re all ha war var e vo da gas an aozadur penn-da-benn d'an traon.

Kemeret em eus skouer an eil derez hogen skouerioù all a c'hellfed kemer. Sioù an devezhioù-studi diwezhañ a ziskouez ivez ur mank a genurzh hag a rakwelerezh.

N'eo ket evit tamall e verkomp kement-mañ, anat eo. Emichañs e c'hellfed tamall a-wechoù un tamm gwallegezh hogen kavout a ra din ivez dreist-holl ez eo re sammet al labourerion gant ar c'hentañ derez ken na c'hellont ober netra er-maez eus ar gevrenn-se. N'eus ket a-walc'h a izili desket ar yezh ganto a-walc'h evit gouestlañ o amzer da skourroù all eus obererezh S.A.E. : imbourc'herezh, eil derez, devezhioù-studi h.a. Evit ar poent emañ an hevelep izili o plediñ gant obererezhioù liesseurt ha n'eo ket souezh ma wallegont hini pe hini anezho. Kavout a ra din eta emañ diskoulm ar c'hudennoù a sav bremañ e diabarzh S.A.E. e diorreadur an aozadur e unan, - hag ivez en uheladur ar barr-deskadurezh vrezhon e-touez an izili end-eeun, e-keñver yezh, istor Breizh, istor an Emsav, politikouriezh, kevredaburiezh h.a. rak an deskadurezh a greñva an emskiant hag an emskiant eo a zegas an dud da c'hoataat ar frammadur. N'eus forzh penaos, berzh-mat hag emled an aozadur a zibenn, da gentañ, diouzh youl ha kendalc'husted ar stourmerion, da lavarout eo, en diwezh, diouzh an dalvoudegezh-den anezho. Houmañ avat n'en em ziskouezo da vat nemet a-benn un nebeut bloavezhioù, a-benn ma vo bet staliet izili S.A.E. er vuhez. Hogen adal bremañ e tle ar re-mañ gouzout n'eo ket an Emsav un diduamant yaouankiz hogen afer o buhez hag emañ kresk an aozadur o deus krouet diouzh o fersonelezh-int o unan. Dezh o eta en em c'houlemm ha fellout a ra dezho gouestlañ o buhez d'ar vro - hep gortoz emberr un trec'h burzhudus - pe hag-eñ e fell dezho hepken tremen un nebeut bloavezhioù en ur fest-noz peurbadus a vo anvet an Emsav.

=====

Ur c'hraf all a fell din sensellout en eil lodenn ar pennad-mañ : hini an darempredoù etre S.A.E. hag an "aozadur" a zo bet anvet E.B.V.

D'am soñj e chom ar c'hudennoù a c'hellfe sevel etre S.A.E. hag E.B.V. difetis bepred. Moarvat , e miz Gwengolo 1969, o devoa divizet un dek bennak a stourmerion vrezhon sevel un aozadur a oa e anv "Emsav ar Bobl Vrezhon" a oa mennet da vont a-hervez war an dachenn bolitikel. Hogen o vezañ ma soñje d'ar stourmerion-se ivez e oa ar stourm sevenadurel an hini mallusañ o doa savet war un dro SKOL AN EMSAV. Abaoe

ez eo bet ret mat gwiriañ n'eus bet klasket frammañ nemet S.A.E. A-fed obererezh politikel ne c'heller menegiñ nemet un nebeut bodadegoù foran aozet evit harpañ Euskariz e Roazhon, pe nevez zo, Iwerzhoniz e Roazhon, Brest, an Oriant ha Sant-Brieg peurvuiañ a-gevret gant aozadurioù all, holl eus ar gostezenn gleizelour a-hend-all. Ouzhpennañ a c'heller embannidigezh ha gwerzhidigezh ul levrig biham, dalc'hidigezh un Devezhioù Studi bennak a c'hellje bezañ bet lakaet kerkoulz all dindan talbenn S.A.E. peogwir e oant gouestlet da gentañ da studi ar yezh. Nepred n'eus bet framm ebet. (anzavomp ez eo bet heñvel an traoù evit S.A.E. betek miz Du diwezhañ) na zoken a izili. Moarvat ez eus bet dalc'het emvodoù zo e Roazhon a-wechoù evit spisaat poentoù zo a gelennadurezh hogen o vezañ bepred ma oa dalc'het ar re a soñje dezho e oant izili eus E.B.V. gant an obererezh e framm S.A.E. n'eus ket bet tu da gas da benn ul labour padus ha sirius war an dachenn-se nepred.

Evit klask sklaeraat degouezh E.B.V. eta o deus divizet pemp stourmer e Plistin, seizh ac'houdevezh en em vodañ evit adsevel E.B.V., pe kentoc'h sevel anezhañ, da lavarout, da gentañ, termeniñ an diazezoù politikel anezhañ ha krouiñ da vihanañ egin ur framm.

Kement-se a zo c'hoarvezet tri miz zo. Daoust hag an traoù a zo aet war-raok a c'houde ar mare-se ? Ne gav ket deomp. Moarvat ez eus bet kendalc'het da gemer perzh e bodadegoù foran zo a-gevret gant aozadurioù all, nevez diwanet ha ken dinerzh hag E.B.V. moarvat (hep intrudu a-berzh stourmerion E.B.V. a-hend-all) ; hogen adarre ez eo bet kemeret holl amzer ar stourmerion gant al labour evit S.A.E. hep ma c'helljent gouestlañ o amzer da labour E.B.V.

Ar goulenn a sav eta a zo hemañ : daoust ha poent eo evit izili S.A.E. a garfe ober ur politikerezh ledanoc'h eget an hini a reer e diabarzh S.A.E., gouestlañ o holl amzer d'ar politikerezh? D'ar goulenn-se, goude gwiriañ ar pezh a zo c'hoarvezet abaoe daou vloaz hanter ha dreist-holl abaoe tri miz, e ranker respont "nann!". Hogos dic'hallus eo e kendegezh politikel ar metou brogar brezhon a vremañ termeniñ ur politikerezh a c'hellfe bezañ degemeret gant an holl, en abeg dreist-holl da skoilh ar gleizelouriezh.

Daou arvez a zo da skoilh ar gleizelouriezh pe ar gleizouriezh dre vras. Diouzh un tu e rann an Emsaverion, darn anezho o nac'hañ a-grenn klevout anv anezhi ; diouzh un tu all ez eus un arvar o kaout darempredoù ingal gant ar gleizelourion hag a zo disoñjal pe wariañ palioù an Emsav. Ret eo gouzout a-hend-all, evel m'em eus diskouezet meur a wech, n'he deus ar gleizelouriezh dazont politikel ebet war verr dèrmen.

Lavarout avat n'he deus ar gleizelouriezh dazont ebet abarzh pell ne lavar ket ez eo tonket da zizeriañ. D'am soñj ne vo gwelet frouezh ar froudadoù mennoziù a zo diwanet e kornog Europa abaoe un nebeut bloavezhioù nemet a-benn ur rummad pe zaou. Dre se, adal m'hon eus da empennañ ur politikerezh e rankomp derc'hel kont, n'eo ket eus mennoziù ha kealiadurezhioù ar gleizelourion a zo dislavarek ha disklaer alies, hogen eus an hiraezhadurioù a zo endalc'het enno. Kement-se a dalvez ne c'hell an Emsav termeniñ ur politikerezh nemet diwar ur studi hir eus ar c'hendegouezh politikel hollek e Kornog Europa hag eus ezhommoù ar boblañs en hor bro koulz hag en hor c'hevandir dre vras.

Ma fell deomp degas ur gemennadurezh orinel ha disurt ez eo arabat deomp en em deurel en ur politikerezh aozet war ar prim, hep diazez gwirion ebet ha na vefe awenet a-benn ar fin nemet gant ar marmouzeriezh hag ar goulzelouriezh. Ma krogfe E.B.V. gant ar politikerezh a-zevri ne c'hellfe nemet kemer e lec'h e-touez ar strollouigoù kleizelour stank da sabatuiñ a zo o terc'hel al leurenn bolitikel e Breizh : U.D.B., P.C.B., Parti ouvrier breton, hep kontañ "La Taupe Bretonne" ha m'ouzon peseurt "aozadur" c'hoazh; evel ar J.E.B. Bruzhunet spontus eo ar metou politikel brezhon ha kredapl eo n'eus ket tu da vodañ un dousemad a stourmerion hep ma c'hoantafe an hanter anezho sevel ur "strollad" nevez. dre ma n'emañ ket a-du gant ur virgulenn eus ar "manifesto" pe, er c'hontrol, dre men deus diskred war unan eus ar rumm enebet a c'hellfe marteze bezañ a-du gant ar virgulenn-se.

Dont a rin endro d'ur mennoz am eus displeget meur a wech. Al labour politikel a zo ul labour frammañ adal an diaz. Pal an Emsav - E.B.V. eta - ne c'hell bezañ nemet pourchas da Vreizh ar frammoù politikel brezhon a adsavo ur gevredigezh vrezhon. Kement-se a lavar e rankomp ober hor seizh gwellañ evit stuziañ ha diazezañ war an dachenn emsaverion gadarnaet en o galvedigezh emsaver dre an deskadurezh vrezhon o devo degemeret end-eeun ebarzh S.A.E.



Pal E.B.V. n'eo ket eta evit ar poent nag ober bruderezh, na, war verr dermen, kemer ar galloud warc'hoazh vintin e Breizh, lakaet e vefe anv eus kement-se. Ne c'hell bezañ evit ar mare nemet kenderc'hel gant labour S.A.E., o tegemer diazezoù S.A.E., da lavarout eo, diazezoù an Emsav e unan, o reiñ d'ar stourmerion ouzhpenn ur stummadur politikel resisoc'h ha donoc'h eget an hini o devo tizhet e S.A.E. hogen a aotreo dezho c'hoari en dazont ur roll er framm stadel a zo da sevel e Breizh.

N'eus forzh penaos ez eo pal E.B.V. war un dro sevel ur gevredigezh vrezhon a gavo he sichenn er yezh. Derc'hel a ray eta er gevredigezh vrezhon an Emsaverion a vo douget d'ar politikerezh foran. Rak un dañjer a zo dres na zidec'hfe an Emsaverion gadarnañ, desket ar yezh ganto, war-du aozadurioù gallek ha ledemsavel ha na vefent kollet evel-se evit an Emsav hag ar gevredigezh vrezhon a zo da sevel da gentañ.

Kement-se zo lavarout e chom al labour sevenadurel kaset da benn e framm S.A.E. ar pep pennañ, an hini ma tle pep emsaver er mare-mañ gouestlañ e holl strivoù dezhañ. Arabat eo deomp ober ar memes fazi hag E.S.B. en deus mennet ober dibaboù politikel krenn kent na vije ledet a-walc'h an aozadur evit ma anadje ur c'hedveno politikel gwirion rak paotred yaouank flamm re aes da levezonañ en ur framm strizh n'o deus e gwirionez atebegzh politikel wirion ebet. Evit ar poent eta ne c'hell E.B.V. bezañ nemet ar gevrenn eus an Emsav a gemer da amkan, diouzh un tu, tuta ha stuziañ Brezhoned emskiantek, keodedourion vrezhon atebek, dre ar bruderezh politikel renet e galleg, ha, diouzh un tu all, ur wech gounezet ar re-mañ d'an Emsav, o heñchañ war-du S.A.E. a zesko dezho ar yezh da vat en ur reiñ dezho ur stuziadur politikel elfennel ; neuze, goude, e vo e roll heñchañ anezho war-du ur stourm politikel liesseurt en ur ziorren o stuziadur politikel end-eeun.

Moarvat, adal ma vo kresket a-walc'h S.A.E. evit krouiñ ur gevredigezh vrezhon a bouez e c'hello dioueriñ darn eus hec'h izili evit en em ouestlañ a-grenn d'un obererezh politikel. Hogen er c'houlz-mañ n'omp ket erruet er bazenn-se c'hoazh hag obererezh politikel rik izili an Emsav a chomo c'hoazh darnel kenañ en o labour. Dre se, ne gav ket deomp ez eo mallus diskoulmañ e berr amzer kudenn an darempredoù etre S.A.E. hag un aozadur politikel n'eus ket anezhañ c'hoazh.

RENTA -KONT DAEL GENTAÑ SKOL AN EMSAV

Gwengamp - 11 a viz du 1971

An danevell-mañ zo bet aozet en ur strollañ ar mennoziou. Dre-se, ha peogwir n'eo ket sklaer bepred ar mennoziou eztaolet gant an den-mañ-den, e c'hell bezañ en em silet direizhderioù a-wechoù. Kavout a ra deomp avat eo bet doujet d'ar mennoziou pennañ.

Dileuridi ar c'hreizenoù :

Roazhon-Keryann : MK, PK, GT.

Roazhon-Kreiz-ker : TL, LL, RK, MO, PL.

Roazhon-Kervrav : IG, GG.

Lanuon :FK.

Gwengamp : JB, IP, HK, PQ.

Brest : BJ.

Pempoull-Landreger : YG.

Karaez ha St Malo : FF.

Eil derez : PK, YO.

Kadoriad : PK.

I - Pal ha roll Skol an Emsav

Y.O. - Pal SAE zo pourchas d'ar Vretoned ur reizhiad kelenn broadel evit deskiñ ar yezh evel ur yezh vroadel, ha dre-se, er-maez eus pep framm kefridiel gall. SAE zo skol ar bobl vrezhon o sevel. Diaes eo empennañ ar pezh a vefe SAE en ur stad pe en un damstad (rannvroeladur). Ret eo kaout ur framm ; anez da-se, ne bado ket SAE, evel kalz aozadurioù all pe labourioù all hag ez aio an traoù da get.

P.K. - SAE zo an tu da vezañ stummet war ar yezh ha war draoù all. Deskiñ brezhoneg da gentañ, ha goude ar skol hollvrezhonek.

F.F. - SAE en deus da bal reiñ deskadurezh d'ar Vreizhiz hervez labour an Emsav, a-feur-maz a war-raok an Emsav hag an emskiant e Breizh. SAE a ginnig ur stummadur vrezhon d'ar re n'o deus ket. Gant SAE frammet e c'hell labourat tud eus strolladoù all (UDB da skouer).

T.L. - Ret eo labourat gant ur sell hollek hag o tiskouez petra a fell deomp.

P.K. - Er c'hlasoù e kinnigan d'ar skolidi perak e kelennan brezhoneg : evit ober eus ar brezhoneg ar yezh vroadel. Ni zo ur skol evit paouez a vezañ gallegerien. Pal SAE zo kelenn ar yezh evel ur yezh vroadel.

F.K. - Da lavarout eo yezh ar vuhez.

II - Diazezoù politikel pe kelennadurel SAE.

F.F. - Diazez politikel SAE zo an Emsav. A-hend-all e c'hell bezañ un diazez renkadel a glotfe gant ar bras eus ar boblañs.

Y.O. - Ar galleg zo bet implijet gant ar vourc'hizien. Ar brezhoneg zo diazezet muioc'h war ar bobl. E Breizh eo ret tizhout ur pal : ar stad, gant e sternioù o tont eus ar bobl-tamm ha tamm. . . . Ar sternioù-se eo e gwirionez a grou ar sevenadur.

F.F. - Ret eo gouzout peseurt sevenadur krouiñ. Da skouer : peseurt istor kelenn d'ar skolidi. Daou ster zo gant ar ger kelennadurezh : ar skol hag ar politikerezh. Kelenn al lennegezh a empleg ur gelennadurezh - da skouer e galleg eo kelennadurezh an hinienn en-dro dezhi hec'h-unan.

- Y
- Y.O. - E pop lec'h, ar skol zo politikel. Kelennet e vez istor ar rumm zo bet trec'h. E Breizh ne vez kelennet istor ebet, nemet istor Bro-C'hall. Ma vefe trec'h ur strollad e Breizh e vefe mui pe vui istor ar strollad-se.
- I.G. - Da ziazez e vo kemeret ar pezh zo bet graet e Breizh : skridoù Roparz Hemon da skouer ("Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh"). E levr Per Denez n'eus nemet lennegezh. Mat e vefe lakaat pennadoù broadel. Er pleustr eo ret degemer an dachenn vroadel.
- F.F. - N'eo ket a-walc'h respont d'ar gudenn vroadel. Roll ar skol eo bleniañ ivez.
- I.G. - E Roazhon eo bet graet bruderezh oc'h embann ne rae ket SAE dibaboù politikel resis.
- P.K. - Ar politikerezh zo dibab ur gevredigezh kentoc'h eget unan all.
- G.D. - E Breizh hag e Bro-C'hall, ar ger politikel en deus ar memes ster. Ar pezh zo politikel e Skol an Emsav eo ar spered broadel. Ober politikerezh zo klask kemer ar galloud. S A E n'eo ket skol ur strollad politikel breizhat. Kemer a ra da ziazez : ar vroad, ar yezh unvan, ar skrivagnerien. Ne reer ket politikerezh er-maez eus ur strollad frammet evit se.
- F.K. - Ar politikerezh zo kemer pe mirout ar galloud. S A E zo stag avat ouzh mennoziou ar re a genlabour ennañ.
- F.F. - S A E a labour da reiñ emskiant d'ar bobl vrezhon eus pezh ez eo evit stourm gwelloc'h a se.
- P.Q. - N'eus ket da zerc'hel ur Skol evel-se en e sav hep ur strollad a-dreñv e gwirionez.
- T.L. - Bez ez eus strolladoù politikel e Breizh a-hend-all, ha reoù all a c'hell bezañ krouet.
- F.F. - E Karaez e teufe da S A E tud eus strolladoù all (UDB, CFDT). Un hent da gemer eo. S A E a rankfe bezañ ur skol a rofe c'hoant d'an dud da stourm.
- I.G. - Gellout a reomp lakaat da ziazezoù S A E :
- 1) S A E zo en heuliad istor Breizh hag an Emsav.
  - 2) Ar brezhoneg ha kudennoù Breizh zo kenstag o stourm.
  - 3) Pal S A E eo reiñ deskadurezh hag un emskiant pobl da bobl Vreizh.
  - 4) S A E zo distag diouzh pep strollad politikel.
- Y.G. - Kudenn S A E zo hini an ober. Ar skol ne lak ket an dud en ober politikel. Pourchas a rankomp d'an dud an elfennoù o deus ezhom anavezout diwar-benn Breizh. Evit diskouez diazezoù S A E eo ret eztaoliñ mennoziou politikel resis.
- T.L. - E Roazhon eo bet divizet e vefe graet gant S A E an holl labour sevenadurel ha studi evit diforc'hañ mat diouzh E B V.
- Y.O. - An diazezoù zo : Ar brezhoneg, yezh vroadel Breizh, ur vroad.
- G.O. - S A E zo heuliad Gwalarn hag al Liamm.
- II - Darempredoù gant ar strolladoù all.
- E B V - IMBOURC'H
- I.G. - Un diforc'h a zo etre E B V hag Imbourc'h diouzh un tu hag ar strolladoù all diouzh un tu all.
- Y.O. - Ret eo frammañ E B V ha S A E a ziforc'h. Kaout devezhioù-studi e brezhoneg penn-da-benn evit E B V, embann levrioù bihan, ur gelaouenn e galleg h.a.

Bremañ n'eus ket tu da gomz eus darempredoù etre E B V ha S A E rak n'eus ket a framm.

- I.G. - War "Imbourc'h" e vez embannet pennadoù diwar-benn S A E hag E B V. Bez ez eus daou ziskoulm : ur gelaouenn evit pep aozadur. Da skouer ur gelaouenn evit S A E gant pennadoù diwar-benn ar yezh h.a.  
Pe neuze ober rentaoù-kont war "Imbourc'h" en anv pep aozadur.
- Y.O. - E-pad ur bloaz e c'heller kenderc'hel gant "Imbourc'h".
- T.L. - Gellout a raio bezañ embannet war "Imbourc'h" pennadoù en anv S A E. Ne vo ket stag S A E ouzh "Imbourc'h" evit se.
- P.Q. - E "Imbourc'h", S A E hag E B V e kaver an hevelep tud. Rankout a rafe bezañ tud disheñvel e penn pep aozadur, E B V ha S A E.
- I.G. - Ret e vo embann un niverenn ispisial eus "Imbourc'h" diwar-benn S A E.

A-benn ar fin e tivizer e c'hellfe "Imbourc'h" dont da vezañ un ti-embann na vefe ket stag ouzh un aozadur resis.

#### GALV

- F.F. - Me zo e-barzh Galv. Talvoudus eo evit al labour war an dachenn du-mañ.
- Y.O. - Mat eo kaout darempredoù personel gant Galv. Galv a ra bruderezh met n'en deus menoz sklaer ebet war ar yezh.
- F.F. - Galv a gomz eus ober ar memes tra ha S A E.: kentelioù ha devezhioù-studi.
- Y.G. - Galv en deus degemeret mennozioù U D B evit ar yezh. Kresket eo re vuan ha kouezhet. Tu zo da zaeliñ gant tud Galv dre an diaz.
- I.G. - Galv zo ur strollad diazezet hag anavezet. Ur strollad nagenniñ eo da gentañ. Met ne ziorre ket ar gevredigezh vrezhon.

Diso c'hoù : Ar pezh a gont evidomp a-benn ar fin eo chom digor, da lavarout eo e c'hellfe tud eus Galv dont e S A E evel tud eus strolladoù all. Kinniget e vez kas bruderezh da c'h-Galv diwar-benn hol labour.

#### PREDER (kudenn b-Paris)

- Y.O. - Ma embannomp danvezioù gant "Preder" eo ret henn lakaat ober en anv S A E en un doare kefridiel. A-hend-all e vo kaset ed da vilin Preder ha Preder a val bleud E S B. An darempredoù etrezomp ha Preder a rank tremen dre framm S A E. Ma embannomp traoù gant Preder e rankomp kaout perzh e renerezh Preder.
- I.G. - Da betra e talvezo "Imbourc'h" ?
- Y.O. - Mat e vefe ober eus "Imbourc'h" ur seurt ti-embann ma ne vez kavet diskoulm all ebet.

#### K.D.N.

- P.K. - K D N zo ur gevredigezh kelennerien. Ober a ra war-dro "Skol Ober". Mat eo da gelennerien S A E mont e-barzh.
- F.F. - K D N zo talvoudus evit stummañ ar gelennerien. Darn vrasañ kelennerien S A E zo dija e-barzh.
- T.L. - Mat e vefe kaout darempredoù kefridiel etre K D N , Skol Ober ha S A E ha peogwir e labouront war dachenoù heñvel pe dost.
- P.K.

Klozet eo bet an emvod da 12.30 evit mont da verennañ.

Evit berraat an danevell e vo strollet ar mennoziou hep derc'hel kont eus ar re o deus o eztaolet.

### III - Frammadur S A E.

a) Daeladenn hir diwar-benn an ezeladur hag an darempredoù etre an izili, ar frammoù lec'hel hag an aozadurioù kreiz.

Piv zo ezel : ar gelennerien a rankfe degemer diazezoù S A E ha tremen un arnodenn bennak pe diskouez ez int barrek da gelenn en amzer da zont. Evit ar mare, n'int ket niverus a-walc'h evit se. A-hend-all ez eo bet kinniget e vefe izili all a rafe war-dro al labourioù mererezh pe sevenadurel er-maez eus ar c'helenn (emvodoù, devezhiou-studi h.a.) Hag e tle un ezel gouestlañ sevel ur greizenn ? Diaes e hañval bezañ, rak an holl n'int ket gouest. Met ret eo d'an ezel gouestlañ labourat. Hogen, daoust hag an engouestladur-se n'eo ket didalvoud, o vezañ ma tleo kompren an ezel, drezañ e-unan, e rank labourat ? Un doare furmel a vefe da gavout memestra evit an engouestladenn : ur follenn da leuniañ pe ur gartenn ezel ? War ar follenn e vefe merket gant an ezel peseurt labourioù ez eo prest da ober. Padelezh an engouestladenn-se ? Ur bloaz pe ouzhpenn ?

Ne c'hell kemer perzh e renerezh S A E nemet izili oberiant e gwirionez. An ezeladur gwirion zo an obererezh. Hogen, daoust ha n'eo ket ret, evit abegoù mererezh, d'an aozadurioù kreiz gouzout piv zo ezel eus S A E ? Pe daoust hag e vo a-walc'h d'ur greizenn anavezout hec'h izili hep kaout na follenn na kartenn evit gwiriañ an ezeladur ha kas dileuridi d'an Dael pe d'ar stroll-ren ? Daoust ha forzh peseurt framme ne rank ket en em anavezout en un doare resis ?

b) Ar c'hreizennoù : pelec'h ez eus anezho.

Ur gudenn : e kreizenn Roazhon ez eus teir gevrenn. Hag e vezint sellet evel kreizennoù ? O vezañ niver an dud e Roazhon e vefe gwelloc'h, d'an nebeutañ e-keñver an dileuriadur. A-hend-all ez eus kreizennoù Brest ha Paris. Evit ar reoù all, n'int ket diskleriet war-eeun dindan anv S A E : Landreger, Pempoull, Sant Malo, Gwengamp, Karaez. Ne oa dileuriad ebet eus ar Vro Bagan. Izili ar c'hreizennoù-se zo e S A E hogen labourat a reont e frammoù lec'hel n'int ket S A E. Dre-se, ne c'hellont ket kemer diazezoù S A E en un doare kefridiel : da skouer, goulenn ouzh o skolidi degemer diazezoù S A E.

A-hend-all ez eus danvez-kreizennoù n'int ket emren c'hoazh hag a zo stag ouzh kreizennoù all.

c) Aozadur ar c'hreizennoù.

E pep kreizenn e rankfe bezañ staelioù : teñzorerezh, sekretouriezh, kelenn h.a. evit aozañ an darempredoù e diabarzh framma hollek S A E.

Ret e vefe ivez kaout ur stael kreiz a bledfe gant sevel kreizennoù nevez, pe neuze e c'hellfent bezañ savet diwar intrudu ar c'hreizennoù savet dija. Er par-se e c'hellfe ar vro bezañ rannet e rannbarzhioù etre ar c'hreizennoù.

Piv a bledo gant an darempredoù gant ur greizenn o sevel ? An aozadurioù kreiz pe ur greizenn dostoc'h ?

d) Dael S A E hag an dileuriadur.

An Dael a c'hell bezañ bodad an holl izili, pe an dileuridi nemetken. Ar stroll-ren a gas war-raok an aozadur hag a gemer disenteziou etre emvodoù an Dael. Ar c'hengorioù a ra ul labour kalvezel en anv an Dael o prientiñ labour an Dael pe ar stroll-ren. An holl izili o defe ar gwir da vont d'an Dael, met evit abegoù pleustrek e vefe aesoc'h dileuriañ ar galloud.

An Dael a zivizfe an diazezoù hag a zileurfe ar strollad-ren.

Ret e vefe kaout tud eus pep kreizenn er stroll-ren, met marteze n'eo ket gwall aes evit en em vodañ hag e vefe pleustrekoc'h dibab tud en ur greizenn.

An Dael a c'hellfe en em vodañ 2 wech ar bloaz. E-pad devezhiou-studi pe en un doare ispisial ? Mat e vefe d'an Dael en em vodañ arak kregiñ gant ar bloavezh-skol, hag ur wech all e deroù ar bloaz (genver - c'hwevrer) ?

e) Ar stroll-ren.

Ar stroll-ren a rafe war-dro an darempredoù diavaez, a gadarnafe an anvadurioù, a genurzhfe al labour (kalvezel dreist-holl). Anvet e vefe bep bloaz. Bez e vefe ur c'hadoriad, ur sekretour, un teñzorer hag un dileuriad eus pep kreizenn. An eil derez a c'hellfe bezañ sellet evel ur greizenn lec'hel. An hini zo e penn an eil derez a vefe dilennet gant kelennerien an eil derez.

f) Mererezh an arc'hant.

Ne vez ket paeet gwirioù-enrollañ e pep lec'h. E lec'hioù zo e vez paeet ur skodenn d'un aozadur estreget S A E.

Roazhon eo a samm ar mizoù, met ret e vo d'ar c'hreizenoù paeañ un darn eus mizoù an aozadurioù-kreiz en amzer da zont.

IV - Ar bruderezh.

Mallus eo ober un trakt moulet o tisplegañ petra eo S A E. Stil "Petra eo S A D E D ? A-hend-all e vefe mat ober ul levrig un tammig pouezusoc'h.

V - An devezhioù-studi.

Ret e vefe kaout ur c'hengor evit se. Ar c'hreizenoù a rafe war-dro an devezhioù-studi lec'hel. Ne vefe degemeret en devezhioù-studi broadel nemet ar re o devo ul live uhel a-walc'h. An danveziou studiet a vefe an holl re zo tu da studiañ en deskadurezh. Mat e vefe ivez bodañ ar skolidi a heuilh kentelioù dre lizher e devezhioù-studi dre gomz.

VI - Anvet eo bet :

Ur stroll-ren da c'hortoz ennañ 5 ezel :

- P.K. : eil derez
- Y.O. : eil derez
- T.L. : Roazhon ha Bro Roazhon
- B.J. : Brest ha Leon
- H.K. : Gwengamp ha Treger

Ar stroll-ren en deus dibabet :

- Ur c'hadoriad : P.K.
- Ur sekretour :: T.L.
- Un teñzorer : B.J.

Ar stroll-ren-se zo bet degemeret da gengor-dezvel. E roll eo kinnig ur onreizh a-benn an Dael a zeu.

Ar stroll-ren en em vodo 1 wech ar miz.

Divizet eo bet gantañ aozañ devezhioù-studi da Neddeg eus an 27 d'an 30 a viz kerzu.

o o o

DANEVELLOU OBEREREZH  
KREIZENNOU SKOL AN EMSAV  
\* \* \*

Roazhon

Gwengamp

Paris ( N'eo ket bet resevet netra digant Kreizenn Baris )

Brest

Bro Bagan

St Malo

N'eo bet resevet netra digant Kreizenn Sant Malo. An den a rae war dro , Gweltas Durand, n'en deus ket gellet hen ober o vezañ m'emañ en toulbac'h.

Begnon

Lannuon

Kastellvriant

Spi hon eus e vo tu da gaout evit an niverenn a zeu, danevelloù ar c'hreizennoù n'o deus ket kaset o re.

\* \* \*

Danevell obererezh Kreizenn Skol an Emsav Roazhon.

Daou vloaz hanter zo bremañ eo bet savet kreizenn Roazhon Skol an Emsav. Kresket eo en un doare ingal, ha kenderc'hel a ra da vont war-raok daoust dezhi da vezañ kollet tud en abeg d'he savlec'h ispisial. Tu a vo da welout neuze peseurt perzhioù dibar a zo gant kreizenn Roazhon. Penaos eo bet urzhiet hervez ar pezhioù-se. Petra a vez graet. Penaos gwellaat al labour e-keñver SAE : diorrenur gevredigezh vrezhon e Breizh.

\* Perzhioù dibar al labour e Roazhon :

Ur greizenn, teir ranngreizenn, pevarzek kelenner, ouzhpenn daou c'hant skóliad ha tud ouzhpenn c'hoazh evit plediñ gant aozadur ar greizenn hag ar mererezh, setu peadra da lakaat kudennoù a bep seurt da sevel. Lakaomp ouzhpenn ez eus un darn eus an dud a vev pe o deus ur vicher e Roazhon, hag ez eus reoù all, studierien anezho, n'emaint e Roazhon nemet eus miz here da viz mezheven hag e vo merzet n'eo ket eeun bepred aozadur al labour.

Diazezet eo bet neuze ar greizenn war dud Roazhon da gentañ. Prientidigezh ar bloavezh zo bet kroget adalek miz gwen-golo gant ar re a oa aze. Graet eo bet bruderezh dirak skolioù brasañ Roazhon o skignañ traktoù (5 000 zo bet embannet). Moullet eo bet skritelloù-bruderezh zo bet peget un tammig e pep lec'h e kêr.

Ur burev evit Roazhon, karget da genurzhiañ an obererezh-se, zo bet anvet. Bez ez eus ennañ ur c'hadoriad, div sekretourez, un deñ zoriez, un den atebek war ar moulañ hag unan war ar bruderezh. A-hend-all, evit kenaozañ al labour gant ar studierion, e vez kaset un dileuriad er burev-se a-berzh pep rangreizenn. En em vodañ a ra ar burev ur wech ar miz.

\* Labour ar greizenn hag ar rangreizennoù.

Teir rangreizenn a zo neuze e Roazhon. Pep hini zo emren a-walc'h. Unvanet e vez al labour dre ar burev hag an emvodoù kelennerien hag ivez dre ar mererezh kreiz (follennoù-enrolloù, gwirioù h.a.). Un emvod o vodañ holl gelennerien Roazhon a vez graet ur wech ar miz abaoe miz genver. Araok e veze graet bep pemzektez. Da bal o deus an emvodoù-se lakaat darempredoù etre ar gelennerien e-keñver o labour, o doareoù kelenn hag ar c'hudennoù a bep seurt a sav diwar o obererezh. Un tu eo da varn efedusted al labour ha da welout hag e klot an ober gant palioù SAE.

Ar c'hentelioù : Meur a live a zo e Roazhon en derez 1<sup>añ</sup> .

Termenet eo bet al liveoù evel-mañ dre vras :

1<sup>añ</sup> bloavezh A : tud dizesk war ar brezhoneg.

1<sup>añ</sup> bloavezh B : tud a oar un tammig . Brezhonegerien a-vihanik .

2<sup>e</sup> bloavezh A : tud o deus desket lenn ha skrivañ dija.

2<sup>e</sup> bloavezh B : evel 2A gant ul live uheloc'h.

Ar livioù a zo c'hoazh alies etre rummadoù heñvel, da deziet eo bet al liveoù ar muiañ posupl.

Evel-mañ eo rannet ar c'hlasoù etre an teir rangreizenn :

Keryann : 3 c'hlas 1<sup>añ</sup> A  
2 glas 1<sup>añ</sup> B  
1 c'hlas 2 A



Kreiz-ker : 2 glas 1<sup>añ</sup> A

1 c'hlas 1<sup>añ</sup> B

1 c'hlas 2 B

Ouzhpenn 1 c'hlas eil derez.

Kergaer : 1 c'hlas 1<sup>añ</sup> A

1 c'hlas 1<sup>añ</sup> B

Ouzhpenn-se e rakweler sevel ur c'hlas nevez ( 1<sup>añ</sup> A ) e miz c'hwevrer.

Kroget eo bet gant ar c'hentelioù e dibenn miz here ha penn kentañ miz du. Daou emvod kelaouiñ a oa bet aozet evit prientiñ ar c'hlasoù : unan e Kergaer hag unan evit kreiz kêr ha Keryann war-un-dro e kreiz kêr.

#### Ar bodadoù-studi.

Kaset eo bet en-dro ar bodadoù-studi en un doare dizingal hervez ar rangreizennoù.

E Kergaer e vez bodet ar skolidi ur wech bep pemzektez, hervez ar c'hlasoù. Studiet eo bet e galleg : istor Breizh ha diazezoù ha labour SAE.

E Kreiz-kêr eo bet aozet daou vodad-studi bep pemzektez ivez. Tri bodad oa bet klasket ober en deroù, hogen ne oa ket niverus a-walc'h an deraouidi e pep hini. An tri emvod kentañ, gant tud nevez bewech, zo bet gouestlet da zisplegañ petra eo SAE, an Emsav dre vras hag un nebeut elfennoù eus istor Breizh.

E Keryann eo bet kroget diwezhat gant ar bodadoù-studi, ha n'int ket c'hoazh reoliek atav. Klasket eo bet spisaat da betra e talvez deskiñ brezhoneg. Hogen, an holl skolidi n'o deus ket bet tro da gemer perzh en emvodoù-se dre ziuver a stlenn.

Un devezh-studi a vo graet e dibenn miz c'hwevrer evit holl zeraouidi Roazhon war an danvezioù-mañ : "Skol an Emsav", " Armerzh Breizh"; " Roparz Hemon ".

#### \* Kudennoù kreizenn Roazhon.

Ur wech plaenaet dre vras ar c'hudennoù kenurzhiadur e chom div elfenn diazez labour SAE da bleidiñ ganto : al labour-stroll e-tre izili SAE hag emskiantekadur ha politikadur ar skolidi.

Gant an emvodoù burev hag an emvodoù kelennerion eo bet diazezet ul labour-stroll evit un darn. Evel-se n'emañ ket pep rangreizenn en he c'horn na pep kelenner en ur c'horn all en e rangreizenn. Eskemmoù a zo, ha divizou a vez kemeret a-gervet. Evit darn avat ez eus nebeut a zarempredoù e diabarzh ar rangreizenn (Keryann dreist-holl), ha SAE a chom un tammig un anv nemetken. An darempredoù a zo anezho e par ar greizenn dreist-holl.

Emskiantadur ar skolidi a vez graet dre ar c'hentolioù evit darn (hag hervez ar gelennerien) hogen ar bodadoù-studi a chom moarvat ar benveg efedusañ o vezañ ma pleustrer war gundennoù resis o tennañ da Vreizh ha d'am Emsav pe c'hoazh da zanvezioù hollekoc'h. Ar bodadoù-se n'eo ket ret d'ar skolidi kemer perzh enno. Pedet ez int nemetken. Re abred eo c'hoazh evit gouzout peseurt frouezh a vo tennet anezho. Tu zo avat d'ober un nebeut evezhiadennoù : diazezoù SAE a rank bezañ anavezet gant an holl skolidi. Evit ma vo efedus al labour e rank ar bodadoù bezañ aozet en un doare reoliek gant un den e penn pep hini. Ar bodadoù a vo unvan, da lavarout eo e teuo an hevelep tud bepred er memes bodad evit chom hap kaout da adkregiñ bepred gant ar memes danvezioù. Diazezoù pennañ an Emsav a c'hello bezañ studiet e kerzh ur bloavezh, hag en-dro d'ar bodadoù e c'hello bezañ diorreet ur vuhez e brezhoneg dre m'en em anavezo gwelloc'h an izili anezho. Rak unan eus ar c'hudennoù eo ez eo digresket ar vuhez e brezhoneg e lec'hioù zo dre ma 'z eus bet kollet tud. Un emskiantadur donoc'h a c'hello lakaat da adaptout an dachenn gollet hag a zlefe, war un dro, kreskiñ aketustod ar skolidi.

Gant al labour a renomp e Roazhon e welomp niver ar vrezhonegerien o kreskiñ a vloaz da vloaz. Klasket eo bet, er bloaz-mañ, mont davet an dud a vev e Roazhon. Berzh zo bet graet, rak kalz tud eus Roazhon a zo devet da SAE. Ar studierien a chom avat an niver brasañ. En o zouez e vo kavet tud a vo gouest da sevel kreizennoù nevez pa guitaint o studioù evit mont da lec'h all. Talvoudus eo eta kenderc'hel gant al labour-se, o strivañ c'hoazh da ziazezañ e Roazhon hag er vro tro-war-dro.

Tangi Louarn gant harp Gwenole Gevel  
ha danevelloù an emvodoù burev ha kelennerien.

Kreizenn Wengamp

- Penaos emañ savet.
- Al labour a vez graet.
- Al labour emacomp e sonj ober.
- Ar c'hudennoù.

E dibenn 1969 e voe savet kreizenn Wengamp. Un ti brav a voe prestet dimp gant an ti-kêr hag eno eo e labouromp abaoe. Ouzhpenn-se e resevomp pep bloaz ur yalc'had digant an ti-kêr, hag evel-se e vevomp dinec'h.

Adalek an deroù eo bet aozet kentelioù brezhoneg. Meur a rummad a zo. Adalek an deraouidi betek ar vrezhonegerion ampart. Kentelioù lennegezh a vez roet pep eizhtez ivez. Un darn eus ar c'hentelioù a vez graet gant izili Skol an Emsav hag un darn all gant broadelourion ned int ket e-barzh SAE. Hogen honlabour a zo unvan a-walc'h hag, ar spered broadel eo an hini a ren en hon touez.

Aozañ a reomp ivez prezegennoù foran ur wech an amzer. An danvez a denn atav da Vreizh pe d'ar broioù keltiek (armerzh Breizh, Istor, lennegezh, h.a...). Abadennoù-kanañ a vez aozet muioc'h mui ivez. Kement-se a vez graet gant ar soñj gedennañ an dud.

Daoust d'al labour a vez kaset a-raok, e sav un nebeut kudennoù, tenn a-walc'h da ziskoulmañ.

An hini gentañ a sav zo hini an ti. An ti-se n'eo ket dimp ha bez e c'hellomp bezañ kaset er maez deiz pe zeiz. Ha soñjal a reomp a vo ret diazezañ un dra bennak en diavaez.

Ouzhpenn-se, daoust d'ar yalc'had a vez roet dimp, hon eus ur vank a arc'hant. (Mat e vefe dimp prenañ binvioù skriverezañ ha lieskrivañ)

O vezañ maz eo Gwengamp ur geriadenn a skolidi ez eo diaes dimp aozañ emvodoù etre an dud evit komz war gudennoù zo. Da lavarout eo n'hon eus ket ar chañs da vezañ studierion ha setu perak n'hon eus ket kalz amzer.

Ur gudenn all ouzhpenn zo hini an darempredoù diavaez. Diaes eo dimp skoulmañ darempredoù stank gant ar c'hreizennoù

all dre ziouer a amser. Padal emañ e soñj aozañ devezhioù-studi evit Treger a-bezh, pezh a aotreo darempredoù gwelloc'h gant kreizennoù hon bro.

Daoust d'an holl gudennoù-se e seblant an dazont leun a bromesaoù evidomp, gant ma kresko hon c'hreizenn.

K S B Gwengamp.

Danevell diwar-benn obererezh Kreizenn nevez SAE e Brest.

1- Savidigezh ar Greizenn.

Distro unan hon izili eus Paris eo en deus aotreet da SAE en em staliañ e Brest e diwezh 1971. Kroget e voe ganti da gentañ gant emweladennoù ha lizhiri prevez. Evel ma ouzer emañ Brest, evit pezh a sell ouzh an "difreterezh" vreizhat, dindan gael-gae ar rannvroelourion a liv o deus graet eus ar ger-se unan eus o "c'heñvlec'hioù", mar deus, "kreñvlec'h" gwall vresk eo e gwirionez ha n'eo ket evit talañ er mare mañ ouzh argadennoù stank ha urzhiet ar strolladoù gall eus an tu kleiz ( D. h. er metoù studier).

Setu eta ma veze ret e miz Here 1971 klask dastum an "happy few" stummet a-walc'h war an "emsavelezh" evit berañ kraonell un ober emsavel brezhonek e brasañ ke hor c'hornog. T.H. ha G.H. kediet gant B.G. a asantas diouzhtu kemer perzh leun er greizenn ha kefleuniañ ar gefridi a gelenner en aozadur. Sternioù kentañ ar greizenn a oa anezho a-benn neuze, eta.

2- Ar bruderezh.

Eil stad hon embregadur a voe ar brudañ. Ret e oa la-kaat an aozadur da vezañ anavezet e Brest, o spisaat kenant ha ma oa tu dibaboù broadel hag arnevesadur ar Skol. Lerc'h ouzh lerc'h e voe kaset teir c'hemenndadenn d'ar wask lec'hel, d.h. eo an div gelaouenn "Ouest-France" ha "le Télégramme". Tremena reas ar gemenadenn gentañ en he hed, an eil hini, avat, a voe "silziget" gant an eil kelaouenn hag eben, "O. F. oc'h eilskrivañ " hor bro", evel-mañ : notre "pays", ha "le T." o titroc'hañ ur rannbennad ma veze embannet ur galv d'an holl Trezhoned " conscients du caractère distinct de leur pays".

Dalc'hioù-enskrivañ a voe graet e-kerz teir sizhunvezh, ur wech ar sizhun d'ar merc'her, en "O.M.J.C." a asantas hegarat da brestañ dimp ur sal a-ratozh hep goulenn kevuzis-

dur ebet. E gwirionez ne zeuas ket kalz a dud d'an dalc'hioù-se, ha n'hor bije ket dastumet kalz skolidi anez dimp en devout bet darempredoù gant brogarourion eus an aozadur "Jeune Bretagne", a c'houlennas "bezañ stummet" hag "advrezhonekaet" gant hon aozadur. Asantet e voe d'eo goulenn. Ret mat eo kompren, amañ, ar perak eus an nebeut a dud deuet d'an dalc'hioù-enskrivañ. Sklaer-tre eo bet dimp e oa en enskrivet abaoe pell er skol-veur c'hall, ar re a felle dezho "studiañ brezhoneg", e lec'h ma vez aozet kentelioù brezhoneg foran evit studierion pe nann-studierion.

### 3- An obererezh.

Chomlec'h SAE a zo O J C straed Lamotte Piquet e lec'h m'hon eus salioù skol. Bep lun da 8<sup>e</sup> ez eus skol. N'eus nemet 3 c'helenner evit ar mare setu ma'z eus dre vras 3 live : unan rummad uhel gant Bernez JESTIN ha daou rummad izel (unan a zo un tamm kreñvoc'h eget an hini all), a zo graet gant T ha G Huon. Hor pal kentañ a zo kelenn ar yezh evel just. Hogen adalek ar vodadeg kentañ ez eo bet diskleriet sklaer ha splann e oa ar Brezhoneg ur benveg (dispac'hel : diouzhtu ez eo bet komprenet rak un nebeut tud a zo aet kuit. Ouzhpenn ar c'hentelioù war ar yezh e vez aozet kentelioù ur pal politikel dezho : istor Breizh da skouer - testennoù politikel liesstenet a vez ivez roet dezho hag a-barzh nebeut e vo devezhioù-studi. Studiet e vez dija pennadoù bet embannet gant Preder er rummad uhel.

### 4 - Un nebeut kudennoù.

20 skoliad a zo evit ar mare. Un nebeut studierion ha micherourion dreist-holl. Gallet hor bije avat kaout kalz muioc'h a skolidi m'hor bije troget d'ober skol abretoc'h hogen ar gelennerion o dije graet diouer deomp. N'omp nemet 3 oc'h ober war-dro SAE e Brest, ha n'eus nemet 5 skoliad er rummad uhel hag a c'hell hor sikour a-benn bloaz : koulskoude tud displijet gant kelennadurezh ar Skol-Veur o deus lavaret deomp e teufent a-benn bloaz. Ur gudenn a sal a zo bet en deroù : betek bremañ hon eus graet skol en O.J.C. Ur vodadeg a vo graet gant poellgor ren an O.J.C.; mouezhiet vo evit gouzout hag-efi omp degemeret pe nann; evit se ez eo ret deomp ober un tamm prezegenn o lavarout ar pezh a reomp e-kerzh S.A.E.

Danevell a Vro-Bagan.

Evit ar mare n'eus ket a greizenn wirion SAE e Bro Bagan  
dacust m'emañ an tri gelenner nemeto e SAE. Ar c'hentelioù  
brezhonek a vez roet en "Oaled Sevenadurel brezhon ar Vro-  
Bagan" hag e c'hell dont d'ar c'hentelioù-se a gar dedennet  
pe get gant labour SAE.

Tri rummad skolidi a zo :

1.- Ar vugale a zeu d'ar yaou goude merenn. Desket a vez de-  
zho ar yezh, un tammig istor, kanaouennoù ha koroll. Hogen  
nebeut en o zouez a zeu ingal d'ar c'hentelioù. An niver ane-  
zho a dremen eus hanter-kant da zaou. Diaes eo ober war o zrodre  
ma n'o deus ket ar re goshañ an amzer a vefe ret evit en em  
ouestlañ d'an dachenn-se.

- An eil rummad en em vod ur sadorn d'an noz bep pemzek de-  
vezh. Eizh anezho a heulh ingal ar c'hentelioù. Labourat a  
reont o-unan etre ar c'hentelioù hag ar c'helenner a zifazi  
al labour dre-skrid. Diaesterioù a zo bet dreist-holl er penn-  
kentañ, dre ma oa ul lod skolidi a gomprens mat tre ar yezh  
hag ul lod all ne ouie mann ebet.

Skolidi an trede rummad en em vod ivez d'ar sadorn d'an  
noz bep pemzek deiz. Eizh skoliad a zeu ivez ingal d'ar c'hentelioù.  
Live ar skolidi a zo etre hini an eil bloavezh hag an  
eil derez. Evit gwir, e vefe gwelloc'h ober daou rummad en o zou-  
ez, met an amzer hag ar gelennerien a ra diouer.

Ouzhpenn-se ez eus un toullad re yaouank o kaout kentelioù  
yezh er skolioù pe er skol-veur. Dedennet ke e vefent gant  
devezhioù-studi a vefe graet tostik a-walc'h eus hon bro. Evit-  
se eo e prientomp un devezh a-gevret gant "An Amicale des Cer-  
cles Celtiques du Léon" e Lesneven d'an 21 a viz c'hwevrer.  
Gwelet 'vo mard eus tu da genlabourat gant ar strollad-se.

Diaesterioù hon eus dreist-holl evit bodañ an dud d'an  
hevelep deiz. Rak kalz ouzhomp a zo pe e skolioù Lesneven ha  
Brest, pe o labourat e diavaez Bro Bagan. Se perak ez eo ret  
deomp ober hon labour pe d'ar sadorn pe d'ar sul.

Ne gav ket din e vefe fall d'hon c'hreizennig bezañ mesket gant un oaled sevenadurel, rak tro hon eus da lakaat muioc'h-mui a vrezhoneg en oberennoù all, da zegas ar ne all da zeskiñ brezhoneg. Disadorn diwezhañ da skouer, hon eus graet enklaskoù e-touez tud Bro Bagan war dazont hon yezh, hon bro, war pezh a c'hortoz ar "Bagariz" eus an oaled. Darn o deus gellet ober an enklask e brezhoneg penn-da-benn. Klask a reomp ivez kaout da-rempredoù gant ar c'hweluniadoù : C D J A, Cid-Unati h.a... En ur ger klask a reomp kemeret perzh muioc'h-mui e buhez hon c'horn-bro ha reiñ hon sav-boent war pep tra a dremen. Hogen n'ez a ket buan an traoù war-raok rak n'hon eus ket kalz amzer, na kement-se a dud o labourat.

Oaled Sevenadurel  
Ar Vro Bagan.

---

DEVEZHIOU - STUDI : rentañ - kont ar gendael  
a - zivout an devezhioù - studi e Plistin

E ser burutellañ an devezhioù-studi ez eo bet tamallèt, da gentañ, an aozidigezh anezho e Plistin.

Ar stroll-ren eo a oa kroget da aozañ an devezhioù-studi. Karget eo bet unan da gavout ur skol ha setu holl.

Lizhiri a zo bet kaset d'ar gelennerion. Kaset int bet re ziwezhat ha n'eo ket bet respontet dezho. Dre se n'eo ket bet aozet ar c'hentelioù en a-raok.

Soñjet eo bet eta e oa ret prientiñ ar c'hentekioù hag a-raok ma vije kavet ar skol zoken, o vezañ ma teu ar re giriek d'an Devezhioù-studi, n'eus forzh pelec'h e vefent.

Burutellet eo bet ar genurzh. A-gevret e-pad tri devezh e fell d'ar re yaouank kemer plijadur. Reizh eo ; met dre forzh e viront ouzh an holl a labourat dereat.

Ar c'hudennoù-se n'int ket nevez tre ; e Plistin int bet gwashoc'h eget kustum avat.

Klasket eo bet ha ne oa ket un abeg ispisial evit na oa ket bet an dud a-zevri kaer war al labour e-pad an devezhioù-studi-se. Merzet hon eus e oa erru un tammig skuizh an dud gant an devezhioù-studi. Abaoe tri bloaz eo bet dalc'het un toullad anezho. Gwell e vefe marteze arnevesaat un tamm an devezhioù studi evit brezhonegerion.

Goude bezañ kavet ne oa ket dispar ur gentel war an danvez-mañ-danvez, un all war un danvez all, goude bezañ soñjet e vefe mat embann al labourioù ez eo bet kinniget dibab ur steuenn evit kenurzh ar c'hentelioù, dibab un tem bennak : ar mor pe al labour-douar pe ar greanterezh, da skouer.

Plijet en deus ar menoz-se d'an dud met o vezañ ma soñje d'an holl e oa mat an devezhioù-studi evit an deraouidi egiz ma oant ez eus savet un nebeut kudennoù : p'eo aozet an devezhioù-studi evit deraouidi eo ret e vefe tost kement a vrezhonegerion hag a zeraouidi ; ha dre se ez eus bewech ur rummad uhel da aozañ hag a vefe re deuc'h marteze da labourat war un tem.

Graet ez eus bet anv eus stummoù d'an devezhioù-studi : kampoù-labour pe c'hoariva. Met dre ziouer a amzer n'eo ket bet spisaet



ar stummoù-se na gwelet hag e oa tu d'o lakaat er pleustr.

SKOL AN EMSAV EIL DEREZ

Danevellskrid KENDAEL DEVEZHIOU - STUDI  
PUISTIN

Kalz tud a zo o teskiñ brezhoneg e Breizh. Bez e c'hell bezañ liesseurt an abegoù o vroudañ anezho. Trivliadoù ar vreizhizelouriezh, karantez ouzh yezh ar bobl vunut e Breizh pe ouzh yezh ar vamm-gozh ; abegoù speredel (mirout pinvidigezhioù krouet gant Doue) pe a zenelouriezh (spont rak unneuz an denelezh) ; abegoù politikel. Pere zo ar re wellañ, ar re bouezusañ, ar re niverusañ ? N'ouzon ket.

Un dra zo sur avat. Merzout a reer, pa seller ouzh ar bed holl, e sav e meur a vro tud da stourm evit o yezhoù. Ar broioù-se a zo broioù trevadennet pe vroioù bihan o klask enebañ ouzh impalaeriezhoù zo. Hag er broioù gwasket o klask en em zieubiñ eo renet, tost dalc'h-mat, ur stourm sevenadurel, ur stourm evit ar yezh. Daou zarvoud kenstag int.

E Bro-Aljeria, tra ma oa ar gouarnamant o sevel a-enep da gompagnunezhioù-tireoul a Vro-C'hall, o'n em lakaat e-giz-se e renk kentañ ar stourm enep-impalaerelour e oa studierion Aljer o vanifestiñ evit ma vefe arabekaet an Deskadurezh e skolioù ar vro.

Ar cheik Mujibur Rahman a Vro-Vengla, m'en deus en em savet er penn-kentañ e oa evit e yezh. Adarre : daou zarvoud kenstag eo stourm dieubiñ ar vro hag ar stourm evit ar yezh.

En amzer dremenet e weler kement-se ivez (da nebeutañ abaoe daou gantved rak a-raok e roed nebeutoc'h a bouez d'ar yezh). P'o deus aloubet ar broioù trevadennet ar broioù trevadennet, e-touez an traoù kentañ graet gant an alouberion, ez eo bet ar gwaskerezh war ar yezh hag ar sevenadur : ar skolioù gall pe saoz er broioù trevadennet ganto ; latinadur Galia hag ar broioù dalc'het gant Galia ; eveljust o deus klasket, da gentañ, gonit ar renkadoù uhelañ met ar bobl a-bezh a glaskent tizhout tamm-ha-tamm.

Perak kement-se ? Un dielfennadur breidel ha kevredigezhel

henn displegfe brav he kempenn, gant gerioù a-vicher. Evidomp-ni, endro d'an daol-mañ, eo splann e laka an arallekadur, an diwriziennadur, kalz aezetoc'h ar c'horvoerezh da reuziañ en ur boblañs bennak. Terriñ a ra an diwriziennadur an nerzhoù diabarzh, luskoù diabarzh ar bobl hag he leuskel a ra dizifenn ha dizarm dindan gwaskerezh ha korvoerezh ar vro drevadenner (Breizhiz, an Indianed, ar re zu). Abalamour da betra e klaskfe Bro-C'hall hiziv an deiz c'hoazh skignañ ar galleg er broioù a zo dindan he levezon, he galloud ?

Ha setu e teu d'ar spered e c'hellfe bezañ ret d'ar broadoù trevadennet adpiaouañ o fersonelezhioù, o yezhoù, evit en em zieubiñ.

Hag er fedoù e welomp ez eus a-unan gant ar stourm dieubiñ ur stourm sevenadurel evit adpiaouañ ur yezh vroadel, da nebeutañ el lodenn vrasañ eus an degouezhioù : Kembre, Iwerzhon, Bro-Vengla, broioù kreiz Europa er c'hantved diwezhañ.

Setu perak e tleomp stourm evit ar brezhoneg ha perak, sur-awalc'h, ne vo disoc'h ebet d'ar stourm dieubiñ e Breizh heptañ.

Met petra eo ur yezh ? N'eo ket benveg eskemm ar gevredigezh a implij anezhi. Stourm a ra ar Vretoned evit o yezh ; implijout a reont anezhi (rak, eveljust, ne c'hellomp ket empennañ an doare ma c'hellfe ar Vretoned stourm evit o yezh, hec'h adpiaouañ hep hec'h implijout!) Peseurt ster a vefe gant gant kement-se ma ne c'hallfent ket lavarout enni pezh o deus da lavarout. Rak ma n'eus ket tu da implijout ur yezh evit pep tra eo ret gouzout ur yezh all. Hag ur bobl n'he deus ket ezhomm eus div yezh ; an hini diorreetañ a chomo ; an hini isdiorreet a vo tonket dezhi mervel. Hag ar brezhoneg a vefe neuze tonket dezhañ eta mont da get.

Ha koulskoude n'eo ket gouest unan desket gantañ madik a-walc'h ar brezhoneg en ur ober bloaz pe zaou da zisplegañ n'eus forzh petore menoz. Er skol c'hall eo bet studiet gantañ meur a zanvez studi : istor, douaroniezh, douarouriezh, jedoniezh eeun, fizik, ur bern traoù a dalvez dezhañ c'hoazh meur a wech. Ha n'eo ket gant al levrioù da zeskiñ brezhoneg ez eus bremañ na gant ar c'helaouennoù lennegel e c'hellou deskifiñ kement-se.

Gwelout a reer eno unan eus labourioù SKOL AN EMSAV eil derez : kelenn an traoù dam-arbennik-se ha difraostañ tachennoù nevez d'ar brezhoneg rak n'eo ket gwir e c'heller er mare-mañ displegañ an holl venozioù boutin a-walc'h e brezhoneg.

Met pa vo kelennet istor, da skouer, daoust ha kelennet e vo an istor hervez levrioù embannet a-berzh ar Stad c'hall ? Me 'gav din eo splann ne c'hellomp ket : ne c'hellomp ket kelenn ez eo Gwesklen haroz Breizh, ez eo bet Breizh ur "rannvro" sioul ha paour a-viskoazh.

"Arabab krediñ ez anavezomp ar Bed maz omp deuet da zeskiñ un dra bennak diwar e benn e levrioù hag e kelaouennoù Bro-C'hall..." a lavar Roparz Hemon.

Pezh a anavezomp dre Vro-C'hall a zo gwelet en ur meleziour disneuziañ. En ur lenn ar c'helaouennoù, ar studiadenoù gall eo ret lenn dindan ar gerioù. Peurliesañ e ranker kompren an droienn "minorités ethniques", un dro-lavar pilpous hag aonik, evel "broadoù gwasket", Breizh, da skouer. Betek tost dieubidigezh Vro-Vengla e komze ar c'helaouennoù eus "guerre civile au Pakistan" ; ar re wellañ a gomze memestra eus "Bengale". Met ret e voe miliadoù a dud lazhet, milionoù a repuidi en dienez evit o lakaat da anzav e oa ur vroad eus "Bengla Desh". Evit Iwerzhon, e-pad n'ouzon pegeit a amzer n'eus bet graet anv nemet eus "brezel relijiel".

Da stourm a-enep d'ar spered impalaerelour-se he deus SKOL AN EMSAV da ober ivez. Da stourm evit anataat bezoud ha kudennoù Breizh Kement-se a ray avat dreist-holl dre ziorren ur gevrenn eus an eil derez a roy tu d'ar skolidi da welout ar bed gant daoulagad brezhon.

I.G.

=====

#### EVEZHIADENNOU

En diviz da heul o deus diskouezet an dud e oant a-du dre vras gant kement a zo bet displeget. Div evezhiadenn a zo d'ober avat da verkañ ez eus bet

- merket pegen drastus e oa evit an den an "dic'hotomiezh" ("daoudroc'hadur"). Da lavarout eo implij ur yezh evit traoù zo (labour-douar, kunujennoù h.a.) hag ur yezh all evit traoù all (uheloc'h, er skouer kinniget).

- merket ivez un arster da resizañ er pezh a anver " unyezhegezh". Bez ez eus un unyezhegezh aotrouniek, gwaskus met bez ez eus ivez un unyezhegezh keñveriel". Da lavarout eo, ur yezh, ar yezh vroadel, ar yezh ar muiañ implijet, ar yezh kentañ. Ha setu pezh a zo pouezus.

=====

SKOL AN EMSAV : KEVRENN AN EIL DER EZ

Ur gevrenn eus SKOL AN EMSAV eo an eil derez. Emren e chom koulskoude e-keñver an derez kentañ. Aozet eo endro d'un den a zo e penn ha da gelennerion a labour evit prientiñ ar c'hentelioù, kas war-raok an enklaskoù hag an imbourc'h, reizhañ ar poelladennoù, skeiñ ar stensiloù h.a. Frouezh ul labour hiniennel hag ul labour-stroll eo kentelioù S.A.E. Un danvez a vez fiziet en un den ha burut-ellet e vez al labour a-gevret. A-hed ar bloavezh 70-71 ez eus bet ur bodad imbourc'h e Roazhon en em vode peder eurvezh bep sizhun evit aozañ gerioù nevez ha kempenn al labour bet prientet gant al labourerion..

Emdroet eo an eil derez war-du prientidigezh dornlevrioù aesoc'h da implijout eget follennoù kaset bep teir sizhun. An aozadur-se a c'houlaka daou dra : da gentañ e vefe prest an dornlevr e deroù ar bloaz ; d'an eil, e vefe un darempred reoliek memestra etre ar Skol hag ar skoliad dre gasadennoù poelladennoù. Ouzhpenn-se, an dornlevrioù a c'hello bezañ implijet gant tud o devo ezhomm anezho evit abeg pe abeg ha na c'hellint ket heuliañ ar c'hentelioù a-hed ar bloaz. Forzh penaos, zoken gant un dornlevr, e chom ar c'hentelioù dre lizher ur benveg studi diazez evit ar re a fell dezho studiañ da vat.

Ar c'hentelioù a zo kenurzhiat hervez prantadoù a deir sizhun pep hini ; bep teir sizhun e kas ar skoliad e boelladenn ha kaset e vez dezhañ ar c'hentelioù da studiañ. Kentelioù zo a zo ret gouestlañ dezho muioc'h a labour eget reoù all. Evit heuliañ ar rummad brezhoneg penn-da-benn ez eo ret labourat tost da ziv eur bemdez.

Rankout a reer menegiñ e reer e Roazhon ur rummad brezhoneg eil derez dre gomz gant ur gentel ur wech ar sizhun.

Er bloaz-mañ ez eus enskrivet skolidi war ar brezhoneg, al lennegezh, ar saozneg, ar jedoniezh, an istor. Ar rummadoù all a zo bet astalet evit ar mare o vezañ ma ne oa skoliad ebet : douaroniezh, tironiezh, latin, gresianeg. Kenderc'hel a reer avat d'o c'has war-raok war un dro gant daou rummad nevez : prederouriezh hag armerzh.

Un diouer a dud a zo c'hoazh en eil derez pe marteze un diouer a amzer a-berzh ar gelennerion a bled a-hend-all gant labourioù kentañ derez. Un urzhiadur disheñvel o lakaat ar gelennerion da gejañ muioc'h a ziorrefe ur spered unvanoc'h en eil derez hogen diaes eo

o vezañ ma chomont pell tre an eil re diouzh ar re all alies. Ha setu perak e vefe mat disammañ tamm ha tamm ar gelennerion eil derez diouzh o labour kentañ derez evit ma chellfent kejañ en devezhioù-studi pe e devezhioù-studi ispisial.

### S P E R E D   A R   S K O L

Ledanaat ar muiañ ar gwellañ an deskadurezh vrezhon e-keñver an danvezioù hag e-keñver niver an dud, setu unan eus amkanioù an eil derez. E-keñver niver an dud ez eus kalz da c'hortoz eus al labour renet er c'hentañ derez. E-keñver danvezioù zo ivez ez eus da glask en derez kentañ an dud arbennikaet a c'hello diorren tachernoù nevez goude bezañ peurzesket ar yezh.

Ur yezh eeun ha resis a glasker sevel. Evit ar yezh arnevez e klasker gwriziennoù implijet a-hend-all ar muiañ ar gwellañ evit eeunaat labour-studi ar skolidi rak ne vo dalc'het ar gerioù a vez aozet bremañ nemet ma vezont implijet gant un niver bras a-walc'h a dud.

An astennadur-se eus an deskadurezh vrezhon ne c'hell bezañ soliet avat nemet war ur stummadur hiniennel start a-walc'h. Un doare da vezañ muioc'h breizhat hag ur benveg-stourm eo war un dro an eil derez ha moarvat eo alese e teu ar forc'hellegezh en e ziazezoù hag en e aozadur : pe skol hollvrezhonek pe skol da lakaat e brezhoneg ar pezh hon eus desket e galleg ? An displavar-se a zeu diouzh ar stad m'emañ Breizh. Ar skol hollvrezhonek zo un dra ret hogen ne glot ket, d'am soñj, er mare-mañ, gant ezhommoù ha dreist-holl barregezhioù an darn vrasañ eus an dud a zo en oad gour dija. Ar skol hollvrezhonek ne c'hello bezañ diorreet nemet pa vo bugale evit hec'h heuliañ penn-da-benn. Ar pezh hon eus ezhomm eta ez eo tud a anavezfe mat ar brezhoneg a vefe gouest da gelenn e brezhoneg danvezioù an eil derez ha ... bugale. Evit an dud yaouank a zesk ar yezh hiziv e tle an eil derez ober anezho Breizhiz, dezho un deskadurezh don e brezhoneg eus o sevenadur pe o "c'hevala istorek", ha gouest da ren o buhez e brezhoneg penn-da-benn, ha da gemer perzh er sourm.

Tangi Louarn

=====

SKOL AN EMSAV HAG E. B. V.

War-lerc'h devezhioù-studi S.A.E. ez eo bet dalc'het ur vodadeg a-berzh E.B.V. E gwirionez e oa koulz bodadeg E.B.V. hag hini SKOL AN EMSAV, an diforc'hañ etre an daou aozadur o vezañ bet dispis evel ma ouzoc'h.

Lakaet eo bet ar gudenn-mañ : daoust hag e talvez e ar boan kenderc'hel da sevel ur strollad politikel a-ziforc'h diouzh SKOL AN EMSAV.

Tud zo a oa a-du evit kenderc'hel gant al "labour politikel" -se, o vezañ ma oa bevennet tachenn S.A.E. hag o vezañ ma oa ur stourm politikel da gas da benn e Breizh. Kinnig a raent ned afe ken E.B.V. e-pad ur pennad war an dachenn foran evit gellout prederiañ war e ziazezoù.

Tud all a nac'he kenderc'hel da glask sevel ur strollad politikel o lavarout :

- ne oa ket ret sevel ur strollad politikel evit ober ul labour politikel ;

- e oa ret, er c'hontrol, derc'hel kont eus pezh a c'hellemp ober ha, kentoc'h, eus an amzer a c'hellemp kavout evit labourat. A-boan ma oa tu da gas da benn al labour divizet e S.A.E. Penaos, neuze, sevel ur Strollad politikel ?

Degaset eo bet da soñj e oa ret da SKOL AN EMSAV bezañ distag diouzh kement strollad politikel zo, hervez he diazezoù. Penaos, derc'hel da gement-se m'emañ tost an hevelep tud e SKOL AN EMSAV? Ha n'eus forzh penaos, ar c'hemmesk-se a zo drastus evit an daou aozadur.

Evit klozañ an Dael eo bet divizet en em vodfe diouzhtu hag a-ziforc'h ar re a felle dezho kenderc'hel gant E.B.V.

Ur bempvedenn diwar niver perzhidi an Dael a zibabas chom en E.B.V. Evit klozañ ar rentañ-kont-mañ e c'hellemp ober an evezhiadenn-mañ :

spi hon eus e c'hellemp bremañ bezañ echuet ar c'hemmesk etre E.B.V. ha S.A.E.. Evit peurechuiñ al labour-se e vo ret kemm feur ar re zoizili eus E.B.V. a zo e stroll-ren S.A.E. Rak me ho ped da gaout soñj ez eus bet dileuriet c'hwec'h den er stroll-se. D'ar c'houlz-se ne oa ket splann an diforc'h etre E.B.V. ha S.A.E. Bremañ avat e verzomp ez eus pevar ezel eus E.B.V. a-ziwar ar pemp a zo deuet d'an emvodoù betek henn. N'eo ket reizh ar feur-se. Ar si diwezhañ eo, spi hon eus, en aozadur.

## BEIGNON

Beignon a zo ur vourc'hadennig war ar maez war an hent eus Plouarzel B.U. da Roazhon, war harzoù Bro-Wened, tost da ziazez-  
arme Koedkidan. Ur vro sioul, gant tud ken sioul all. N'eus enni da  
binvidigezh ekonomikel nemet ul labour-douar hengounel rik, ha paour  
eveljust. Ar pep brasañ eus ar re yaouank a ya kuit da Roazhon ha  
peurvuiañ pelloc'h.

Eno ez eus bet savet ur greizenn gant S.A.E. arlene. Skol  
kentañ derez a veze graet gant un dek bennak a skolidi, skolajerion ha  
labourerion. Devezhioù-studi da bleustriñ war gudennoù ar vro a veze  
graet bep ar mare ivez. Da gelenner e oa Yeun Gourvez.

Ar bloaz-mañ hag ar c'helenner kentañ aet kuit, ez eo  
kendalc'het an traoù gant o lañs avat ; graet e vez skol bep sadorn  
da noz. En ul loch eus ur c'hamp yaouankiz e Koad Brekilien (kaerat  
endro da aweniñ an dud!) e veze graet skol, da gentañ, kent eo deuet  
a-benn skolaerez ar vourc'h da gaout un aotre gant an Akademiezh  
deomp d'ober hor c'hentelioù e skol izel Beignon evel arlene. Seizh  
skoliad a zo chomet eus ar re a oa kroget ar bloaz tremenet.

Graet e vez un eurvezh skol bep taol gant levr A. ar  
C'halvez. E stumm ur c'hendiviz e vez aozet pep kentel, gant an  
nebeutañ ar gwellañ a yezhadur (pemp munud d'ar muiañ). N'eus ket  
ezhomm a zisplegadurioù gramadeg hir pa zeu gant ar skolidi stummoù  
frazennoù ar gentel en un doare naturel dre o implij hag o adimplij.  
Diaes eo deomp koulskoude dre maz eus skolidi a zo war o studioù  
ha re all n'int ket gwall voaz ouzh al labour spered. Hoge pa vez kaoz  
a zivizout n'eo ket ar re-mañ a vez ar berrañ o zeodoù.

Goude ar c'hentelioù e vez studiet danveziou o tennañ da  
gudennoù ar vro pe ar c'horn-bro. Studiet ez eus bet evel-se :

- emdroadur poblañs Veignon :
- poblañs Veignon hag an divroañ e-touesk ar re ayaouank  
(kavet e vo disoc'hoù an enklask-se war niverenn 24 IMBOURC'H) ;
- Emsav 1932 : displegadenn gant un ezel eus ar strollad ;
- an emsavioù folklorel e Breizh ;
- strolladoù politikel Breizh : U.D.B., S.K.B., E.B.V., E.S.B.
- ar strolladoù politikel gall dirak kudenn Vreizh ;

- ar stourm sinikalour ;  
- kudennoù ekonomikel ar c'horn-bro ; an di-ijinerezhadur(1),  
al labour-douar hengounel (labourerion-douar lamet diganto o douaroù  
evit kreskiñ kamp Koetkidan) h.a.

Savet e vo kentelioù all d'ar sadorn d'abardaez evit tud  
o kregiñ. Traktoù a zo da vezañ skignet er c'humunioù tro-dro  
(Gwern h.a.)

Betek henn n'omp ket re ziaes gant netra, nemet klask  
ul lec'h d'ober skol e deroù ar bloaz. An diaesañ a vo kavout ur  
c'helemer all a-benn bloaz. Cheñch kelenner bep bloaz n'eo ket  
aesaat an traoù d'ar skolidi kennebeut.

Emaomp ivez e soñj aozañ devezhioù-studi a-raok dibenn  
ar bloavezh-skol ivez.

Kreizenn Veignon

(1) "Di-industrieladur".

=====